



# Ret eo d'al labous nijal . . .




Ret eo d'al - la - bous ni - jal, Pa



zi - fluk eus an neizh ; Ret eo d'an e - beul




frin - gal Er park a - hed an deiz ; Ret



eo. d'an had di - hu - nin En tomm - der hag er



glao ; Ret eo d'ar bleunv di - ge - rin, Pa



deu an am - zer vrao.

*Ret eo d'al labous nijal  
Pa zifluk eus an neizh ;  
Ret eo d'an ebeul fringal  
Er park a-hed an deiz ;  
Ret eo d'an had dihuniñ  
En tommder hag er glao ;  
Ret eo d'ar bleuñv digeriñ,  
Pa deu an amzer vrao.*

*Ret eo d'ar galon ivez,*

*Pa vezo deut ar pred ;  
Dihuniñ d'ar garantez  
Ha bleuñviñ ouzh he sked.  
O lezit-hu da vonet,  
Goustadik dre al lann,  
Ivonig gant e Janed,  
Ha Mari gant he Yann.*

**ROPARZ HEMON.**

(Hervez un ton a Vro-Gembre.)